



TGM ambrouger-ez desavadurel bugaligoù vrezhonek

Meret eo al lies-degemer « Bisigoù » gant ar gevredigezh (hervez lezenn 1901) anvet « Babigoù bro Roazhon ». Aotreet eo gant Kuzul- departamant an Il-ha-Gwilen. Degemer a ra ingal ha/pe a-wechadoù, bugaligoù etre 3 miz ha 3 bloaz.

Brezhoneg eo yezh al lies-degemer. E-pad an deiz eo ar brezhoneg yezh buhez al lies-degemer magouri. An treuzkas d'ar familhoù, an eskemmoù gant kendivizerien diavaez a c'hall bezañ graet e galleg.

Kemer a ra perzh en ober war-dro ar vugale dre vras war ar pemdez, kenlabourat a ra gant ar rener-ez, an desaver-ez bugaligoù hag an eilbabigour-ez, en ur zoujañ d'ar raktres desavadurel ha pedagogel.

Ar post :

- Kevrat didermen leunamzer - 35e dre sizhun.
- Gopr hervez emglev labour ar buheziñ
- Lec'h labour : Roazhon

Obererezhioù pennañ :

- Labour gant ar vugale (yezh ar vuhez : brezhoneg).
- Emelladennoù / Treuzkasadennoù davet ar gerent.
- Labour gant ar skipailh desavadurel.
- Kemer perzh el labour war-dro ar predoù
- Kemer perzh el labour kempenn.
- (n'eo ket klok listenn ar c'hefredioù).

Stummadur / Barregezhioù :

- TGM ambrouger-ez desavadurel bugaligoù (a-raok TGM bugaligoù) pe skiant-prenet mager-ez pemp bloaz da nebeutañ
- pe diplom live V war an dachenn Red-micher Sokial.
- Ober aes ha diboan gant ar brezhoneg (live B2).
- Anavezout reoladoù an HACCP.
- Skiant-prenet war an ober war-dro bugale